

Ar Gazetenn Vihan



Evit ar re vihan hag ar re vras !

*

**Gant kalz a sujedoù disheñvel hag
istoriou a bep seurt : danevelloù
polis, istorioù a garantez,
reportajoù, bandennoù treset...**

*Ar gazetenn-mañ a zo plijus evit an holl
vrezhonegerien, eus ar 6^{vet} betek an Term,
ar Gazetenn Vihan a blijo d'an holl...*

Gwall-daolioù 2015

Gwall-daolioù d'ar 13 a viz Du 2015

Digwener 13 a viz Du eo bet an deiz diwezhañ evit tud digablus hag a oa o tremen un abadenn sioul e Paris. Perak ?

Gwall-daolioù a voe kaset da benn e Pariz d'an a 13 a viz Du 2015, adalek serr-noz, ha graet gant tud eus Stad islamek hervez a voe embannet gant pennoù-bras an aozadur. Fusuilhadennoù, tarzhadennoù-emplazh e Pariz en 10^{vet} hag 11^{vet} arondisamantoù (ru Bichat, ru La Fontaine-au-Roi, ru Charonne, er Bataclan, ha boulevard Voltaire), hag un dagadenn all a voe e Saint-Denis tro-dro d'ar sportva « Stade de France » ivez. 129 den a zo bet lazhet, 352 gloazet, gant 99 anezho gloazet-fall. Dre an niver a dud lazhet ez eo ar gwall-daolioù gwashañ a zo bet er Frañs abaoe fin an Eil Brezel-Bed.

Aergelc'h

Miz Genver 2015 : ar vreudeur Kouachi hag Amedy Coulibali, en anv da Al-Qaida er Yemen ha d'ar Stad islamek, o devoa aozet un heuliad gwall-daolioù hag a grogas gant al lazhadeg e sez ar gazetenn *Charlie Hebdo* hag a echuas gant tagadenn an *Hyper Cacher*. Koll o buhez a reas seitek den e-kerzh an argadennoù...



Tud o vemoriñ ar re lazhet gant ar sponterien dirak unan eus an tavarnioù taget

Diarbennoù enep sponterezh

Abaoe an 8 a viz Genver 2015 e oa bet ar steuñv Vigipirate lakaet etrezek ar muzul « diwall gwall-daol » e Pariz, dre urzhioù ar c'hentañ ministr.

Abaoe an 12 a viz Genver 2015 e lak Prezidant ar Republik, penn al luoù, da dalvezout war ar vro a-bezh an oberiadur "Sentinelle" evit talañ ouzh ar riskl a sponterezh ha difenn al lec'hioù arvarus dre ar vro. An oberiadur a gendalc'h hiziv-an-deiz c'hoazh.

Stad a reuziad: d'an 13 a viz Du 2015 e oa bet votet astenn ar stad a reuziad bet embannet gant ur C'huzul ar Vinistred dreist-ordinal e-pad an nozvezh eus an 13 d'ar 14 a viz Du.

A-berzh Wikipedia

Goulennet hon eus o santimantoù diwar-benn ar gwall-daolioù d'an digwener 13 a viz Du 2015 gant hon mignoned.

Daoust hag eñ e anavezez tudoù a oa er « Bataclan » ?

Jeanne RECULE : Nann, met anavezout a ran un den hag a oa prest da vont d'ar « Bataclan » an noz-mañ.

Petra eo da soñj war ar gwalldaolioù d'an 13 a viz Du ?

Jeanne RECULE : D'am soñj eo null peogwir ez eus tud hag a zo marv evit netra.

Daoust hag eñ e anavezez tudoù a oa er « Bataclan » pe er « Stade De France » e-pad ar gwall-daolioù ?

Mélissa MADEC-PELLE : Ket, met ma breur bras a oa er « Stade de France » div sizhun a-raok.

Peseurt sentiment ho peus diwar-benn an dra-se ?

Mélissa MADEC-PELLE : Null tre eo peogwir n'o doa ket an tud lazhet ha gloazet goulennet tra ebet.

Gwall-daol Charlie Hebdo

Me 'zo Charlie !!!

Pajenn gentañ *Charlie Hebdo* Niv.
1178 treset gant Luz



D'ar merc'her 7 a viz Genver 2015 e oa bet ur gwall-daol e ti *Charlie Hebdo* e Pariz : tro-dro 11 eur 30 veure e c'hoarvezas ur gwall-daol e burevioù *Charlie Hebdo* e-kerzh un emvod kelaouenniñ, tra ma oa nevez embannet niverenn 1177 ar sizhunieg. Daou zen armet, ar vreudeur Kouachi, a yeas e-barzh an ti gant armoù AK-47 hag un RPG. War a seblant e klaskent lazhañ rener ar gelaouenn, Charb, dreist pep tra, peogwir e oa ur «fatwa» war e benn betek embannadenn flemmskeudennoù Mahomet gant *Charlie Hebdo*. Daouzek den a voe drouklazhet gante, ha pemp a voe gloazet. Sentiñ a rae ar muntreierien ouzh Al-Qaïda. Lazhet e oa bet ar vreudeur Kouachi gant ar boliserien daou zeiz goude ar gwall-daol.

Lazhet e voe an dreserien Cabu, Charb, Honoré, Tignous ha Wolinski, ar bsikanalizeres Elsa Cayat, an armerzhour Bernard Maris, ar poliser Franck Brinsolaro a ziwalle Charb, ar skridreizher Mustapha Ourrad, un den pedet, Michel Renaud, ha paotr ar c'hempenn, Frédéric Boisseau. Ur poliser, Ahmed Merabet, a voe lazhet er-maez, er boulevard Richard-Lenoir, gant an daou zen o tec'hel kuit. Unnek den all a voe gloazet, pevar dreist-holl a oa gloazet-fall.



Wolinski, Cabu, Charb, Bernard Maris ha Tignous

Goulennet hon eus gant Lucie Quemeneur ar pezh eo soñjet diwar-benn ar gwalldaol-mañ ganti.

Peseurt sentimant az peus diwar-se ?

Lucie Quemeneur: Me zo kalz, kalz fromet gant an darvoud-se, grevus-tre eo !!!!!!!!!!!!!!!!!!!!!

A-berzh Wikipedia

Malo hag Oxana



Ur wech e oa ur paotr hag a oa amourous-tre d'ur plac'h anvet Oxana. Malo Redoute e oa e anv. Bihan-bihan e oa, gant botoù gwall hir, evel ur furlukin. Pevarzek vloaz e oa, ober a rae iskrim, ul live uhel-tre en doa hag trec'het en doa kalz adversourion. Ur plac'h hag a rae BMX e oa Oxana. Krog e oa gant an trede hag ur gwallzarvoud he doa bet gant he marc'h-houarn.

An daou zen yaouank-mañ a oa un tammig droch hag a oa amourous-tre an eil d'eben. Blev melen sklaer en doa Oxana, setu perak e c'hoarze pa gonte Malo ur bourd.

Ur deiz bennak en doa tapet Malo ur pezh mell taol e-barzh e benn hag kouezhet e oa. N'en doa ket komprenet petra a c'hoarveze gantañ, neuze sellet en doa en-dro dezhañ hag gwelet en doa un den ken bihan hag eñ o redek kuit buan. An devezh echu ne ouie ket piv e oa an den-se en doa roet un taol dezhañ.

Neuze e oa tremenet an devezhioù. Malo a oa oc'h en em c'houlenn kalz traoù diwar-benn an den dianav. Met un deiz e komzas un den anvet Ryan dezhañ : lavaret a reas e oa ret dezhañ paouez da garout Oxana peogwir e vije kalkennataetoc'h ganto anez. Malo a respontas ne oa ket Ryan e dad hag e oa e vuhez. Neuze, evit echuiñ, e lavaras Malo d'ar paotr da vont da sutal.

Sioul e voe an devezhiou war-lec'h evit Malo, kudenn ebet gant Ryan. Bemnoz a oa Ryan o leñvañ eus e du, peogwir e oa jalous-brein. Neuze e klaskas penaos ober evit bezañ karet gant Oxana ha soñjet en doe e oa ret dezhañ ober farsadennoù.

Neuze e reas en doare-mañ evit dont a-benn da zebochañ Oxana. Ober a reas askell dezhi. Hunvreal a rae diouti ha c'hoant en doa dihuniñ en he c'hichen, met ne c'helle ket, siwazh ! Komzet a reas dezhi met digareziou a roas dezhañ evit mont kuit buan. A-benn ar fin e kasas ur galon dezhi dre SMS.

Hegaset e oa Malo ha goulenn a reas un tamm sikour digant Youna ha Mensye, mignonezed dezhañ, evit en em zizober deus Ryan. Kavet a rejont un dro-gamm d'ober e-barzh priveziou ar skolaj.

Da heul...

Danevell gant Titouan, 3de

Ur Vruluskenn e skolaj an Hirwazh



D'ar seitek a viz Kerzu e voe kavet ur vruluskenn, nini Lukian Ferrec, da 17 eur 30, e skolaj an Hirwazh, er privechoù, istribilhet dre e vizied-troad bihan.


Kavet e voe ar paour-kaezh Lukian, ur skolajiad, gant Naig Gouzien. Galvet e voe ar bomperien evit dont da welout ar c'horf. Titouan le Guen, a oa oc'h ober ur staj ganto, a zeuas ivez neuze, ha pa welas ar vruluskenn, e voe ar paotr spontet bras hag ez eas da zislonkañ e-barzh ar privechoù hag a oa e-kichen. Pebezh souezadenn pa welas Tangui Loaec ha Manuel Bodenes, daou baotr yaouank, istribilhet ivez, met ar wech-mañ dre o divskouarn !

An enseller Vald a voe lakaet war an afer-mañ. Goude kalz furchadennoù e tiskredas war Greenpeace, rak lavaret o doa war Facebook o doa graet an taol ; war Garlonn Petit, ur skoliadez, rak fuloret e oa-hi war Lukian, Tangui ha Manuel a oa o kanañ dalc'hmat : « Bevet, bevet ar bronnoù brav !!! » ; hag ivez war Aotrou Janpris, ur c'helenner, rak lavaret oa bet gant skolajidi ar c'hlas e oa fuloret-rik war Tangui, Manuel ha Lukian, a oa o risklañ war gadoriou gant rodoù a-dreuz e sal e-pad e gentelioù ha ne raent ket o labour ; ha evit echuiñ war Aotrou Beleg, ur c'helenner all, rak kalz tud ne saludont ket anezhañ ha rak ur wech en doa lavaret Lukian dezhañ : « Kit da c'hoari koukou gant ma mamm », ha Manuel ha Tangui o doa c'hoarzet e-pad an eur a-bezh goude bourd Lukian.

Goulennataat a reas Vald ar skolajidi a lavarjont o doa gwelet Aotrou Janpris gant Garlonn Petit o vont d'ar priveziou ugent munutenn a-raok ar muntroù. Met goude kalz a c'houlennoù hag enklaskoù e tiduzas an ensellerien Vald e oa kiriek Aotrou Janpris. Rak ouzhpenn-se e oa bet adkavet e ADN war korfoù Lukian, Manuel ha Tangui.

Da heul...

Ur blanedenn iskis-kenañ



Demat d'an holl !

Un dra spontus hon eus da lavaret deoc'h. Ar sizhun dremenet, d'ar pemzek a viz Meurzh 3015, e oamp bet war ur blanedenn evit tremen vakañsoù. Ur blanedenn ergerzhet james c'hoazh e oa, hag iskis-kenañ 'oa. Skrivañ a reomp an destenn-mañ evit diskrivañ tout an traoù hon doa dizoloet deoc'h.

D'ar pemzek a viz Meurzh eta, oamp erruet war ar blanedenn. Evit kregiñ hon doa gwelet ur park gant meur a loen o vezañ ganet gant plantennoù. Kavet hon 'oa an dra-se iskis-kenañ, evel just, souezhet oamp !

Goude-se hon doa bet aon bras, peogwir oa un den deuet er-maezh eus un toull. N'en doa ket dremm. Sellet hon doa e-barzh an toull, hag ur sal vras e oa e-barzh, gant tud eus ar vro : Oompa-Loompaed hep dremm war o fenn. Aet oamp tre ur vougev, hag un nor 'oa dirak un daol. Digoret hon doa an nor, hag a-dreñv dezhi e oa ur gêr graet gant madigoù ha gwastell. Oompa-Loompaed a oa o tebriñ an tiez !

Un tammig goude-se e oamp o pourmen pa en doa huchet un

Oompa-Loompa deomp : « C'HWI ?! AR RE DILENNET OC'H !!! »
Abaoe pell-pell emamp o c'hortoz ac'hanoc'h ! Deuit ganin, emañ o
vont da lakaat ac'hanoc'h da visitañ. ». Ha heuliet hon doa anezhañ.









Goude ar weladenn, en doa pedet ac'hanomp asambles gant
TOUT an Oompa-Loompaed evit drebiñ « opotuo », o meuz muiañ-
karet. Ne oa ket mat !!!

Goude-se en doa Grabuk, penn-bras an Oompa-Loompaed, kaset
ac'hanomp d'un ti-madig evit kousket. Ha pa oamp o kousket, hon doa
kroget da roc'hal. E-kreiz an noz e voemp dihunet gant ur c'hoant
dislonkañ ha teuc'hal. Arruiñ a reas Oompa-Loompa deus pep lec'h
gant kontelloù bras ! Huchet hon 'oa ha tec'het kuit hon 'oa prim !
Treuzet hon 'oa karter an tiez e madigoù ha gwastell, treuzet hon
'oa ivez tout ar parkoù iskis evit mont en-dro d'hol lestr ar spas.







*Erruet omp en-dro war hon douar-patatez kozh ha staliet
trankilik e-barzh hor studio hon eus skrivet an istor-se evidoc'h !*

Echu !











AL LOENAKRONED




AL LOENAKRONED





AL LOENAKRONED



AL LOENAKRONE





E C H U

Barn Paris

An holl zoueed 'zo pedet evit eured Pele ha Thesis war menez Olimp, nemet Eris, doueez an Dispeoc'h. Evit en em veñjiñ e vann un aval aour e-touez dezho. « Evit an hini vravañ » 'zo skrivet warnañ. Teir doueez a c'houlenn an aval, Hera, Atena hag Afrodit. Evit paouezañ an tabut e urzh Zeus da Hermes kas an doueezed d'ar menez Ida. Aze emañ Paris, mab roue Troa, o vaesa deñved : eñ a zibabo. Profañ a ra Atena an trec'h er brezel dezhañ, Hera galloud war an holl dud, hag Afrodit, doueez ar garantez, kalon ar vaouez kaerañ eus ar bed a-bezh, Elen, gwreg ar Gresian Menelas. A-benn ar fin e ro ar paotr yaouank ar maout da Afrodit. Diouzh an testennoù, en deus Paris skrapet Elen pe heuliet he deus Elen Paris betek Troa.

Barn Paris a zo kaoz da vrezel Troa peogwir e fello d'ar C'hesianed veñjiñ ar zivegañs-mañ. Se zo kaoz ivez e vo Afrodit eus tu an Droyaned e-barzh pep emgann.



Marellig roman